

## NAIG HA MORVIL AN EGOR

### Pennad kentañ

*Lec'h ma reomp anaouedegezh gant Naig Jones hag hi souezhet bras p' he deus tro da c'houzout un dra iskis.*

Ar mor a oa o c'hourdrouziñ, evel ur ramz bras meurbet kousket mik o roc'hal hag o roc'hal choazh, a soñje dezhi. Trouz ar gwagennoù o strakal war ar reier a save uheloc'h-uhelañ, ken ma kavas dezhi e vije kaset kuit gante a-benn nebeut amzer. Met n'eo ket ar mor a rae kement a drouz e gwirionez, en em lavaras dezhi he-unan, nann avat, disheñvel bras e oa an trouz a gleve a-bell, ken kreñv hag hini ar mor, met war un ton nemetken.

*Ar Vulzun, ya, ar Vulzun an hini eo, evel-just, emañ o tistreiñ da Wipavas. Poent eo dit dihuniñ bremañ ha sevel buan, ale Naig kaezh !*

Naig a azezas war gorre he gwele ha klask sellout dre ar prenestr ha tost erru oa ar fuzeennig, met dav oa dezhi damserriñ he daoulagad gant ar sklêrijenn a zeue er gambr d'an eur-mañ. Mont a reas goustadig betek ar prenestr ha digeriñ anezhañ ha bazailhat ur wezh c'hoazh.

" Kroget eo ar vakañsoù!" emezi.

Er-maez e oa bec'h bras gant tud an aerborzh ahont, evel merien pa vezont direnket, rak ar Vulzun ne veze ket alies o tont betek Gwipavas. Normalamant e touare ur wezh pe ziv er miz, hag an hini-mañ a oa an eil er sizhun.

*Iskiz 'ta, petra zo kaoz ez eus ar monedone gant ar Vulzun, hañ? Goulenn a rin digant Mamm bremaik... Pe pellgomz dezhi diouzhtu?*

Ur sell war an eurier: dek eur hanter. Ur blijadur sevel ken diwezhat! Cheñch brav oa bremañ gant mare ar vakañsoù, pa ranke-hi kemer an tram' ken abred ordinal evit kregiñ bemdez gant al labour er Skol ar C'hirri, e Brest. Dek eur hanter. Echuiñ a rafe mamm Naig, Branwenn Jones, gant he beurevezh evezh en aerborzh da unnek eur, gwelloc'h oa da Naig

gortoz araok klask gouzout hiroc'h diganti. Divizout a reas mont dindan ar strinker ha dijuniñ neuze. Ha koulskoude he dije bet c'hoant kaout an displegadenn diouzhtu.

Pa grogas gant he dijuniñ, he blev hir gleb un tamm c'hoazh, en em rentas kont penaos e oa bet unan bennak o klask gervel an ti e-pad an amzer ma oa bet er sal-dour. He gwerennad laezh-soja en un dorn, ar pellurzhier en dorn all, e lakaas ar pellgomzer da vont en-dro.

Skeudenn he mamm a zeuas war-wel.

"Hem, me an hini eo, Branwenn, ma merc'h" a lavaras-hi, tres ar strafuilh warni. "Penaos din-me... Hem, n'hellin ket distreiñ d'ar ger araok nouspegeit, ret eo din chom amañ ur pennad c'hoazh. Ur gudenn bennak zo... Netra grevus! Met, bon... Arabat bezañ chalet. Ken bremaik."

Tevel a reas Branwenn hag ar skeudenn a yeas diwar-wel. Chom a reas Naig da sell ouzh skramm dall ar pellgomzer, ul loaiad muesli en he genoù, dispourbellet he daoulagad. Darbet voe dezhi tourloñkañ ar meskaj edaj ha frouezh.

*"Netra grevus... Arabat bezañ chalet... Ur gudenn bennak"! Na petra eo an istor-mañ? Sur on ez eus un dra a-dreuz aze. Ha perak e santen ne oa ket Mamm en he bleud tamm ebet? Kuzhat he anken e ra... Daoust da betra e rank nompas kuitaat an aerborzh? Abalamour d'ar Vulzun a zo degouezhet tuchantik? Ne oa ket trawalc'h din semplañ dec'h?*

Ha Naig ha kas he selloù war-zu an egorlestrig ken bras hag eoullistri ramzel gwechall o doa saotret ar vro ken alies er c'hantved tremenet. Droch an traoù, anat dezhi, hag ar rezon ganti, sur! Eviti e seblante ar Vulzun bezañ ur seurt morvil metal, gant peskedigoù spontet en-dro dezhañ o tont hag o vont a bep tu.

"Mont a ran di!" emezi.

## Eil pennad

*Er pennad-mañ e teu hon harozez yaouank a-benn da vont betek tour-kontroll an aerborzh, met n'eo ket evit kejañ gant he mamm.*

Ne oa ket bet pell da lakaat he dilhad ha redek betek logell dostañ an tram'. Didrous ec'h erruas an tramway a gase an dud etre karterioù Brest, eus Gwipavas da Gonk-Leon, ur c'harr gwenn-ha-glas hag a ruilhe e-unan, arsav da arsav, hep blenier ebet. Edo Naig o pignat er wetur a-sav dirazi pa glevas mouez ur paotr o c'hervel anezhi.

"Opala, Naig! Da belec'h ec'h ez aze 'ta?"

Treiñ a reas he fenn a-gleiz hag e welas ur paotr hag a anaveze mat, o tostaat outi. Dav voe dezhi pouezañ war bouton an ehan, kuit d'ar paotr tapout e fri gwaegat gant an nor o serriñ. Hemañ a sache e alan, ken buan en doa redet gant ur pezh mell sac'h war e chouk evit tizhout an tramway a loc'he bremañ.

"Sell 'ta piv! Fulup ar Bihan! Na sammet brav out aze evit mont da Enez Eussa", emezi. "Prest out da vageal, neuze?"

"Hag ec'h on. Hou! Kavet 'teus. Hou... Sorserezig Ruz. Ur prantad bageal 'ran war Enez Eussa. Met te, da belec'h..."

"D'an aerborzh. Ur Vulzun a zo o paouez douarañ ha c'hoant 'm eus d'ober ur weladenn. Ha n'on ket ur sorserez. Meur a wech out bet o komz eus da vakañsoù, netra ken."

"Dedennet out 'vel da dad gant ar fuzeennoù? Ne ouien ket e oas." a lavaras Fulup, en ur ober van n'en doa ket graet Sorserezig Ruz outi. "Gwelloc'h eo din bezañ war vor evit nijal betek Eurosterenn, ya sur."

"Gouzout a ran." a respontas ar plac'h yaouank, ur mousc'hoarzh war he dremm. "N'eo ket ar fuzeenn a fell din mont da welet bremañ evit gwir, met un dra bennak dreistordinal a seblant bezañ c'hoarvezet du-se."

"Ha petra eo an darvoud-se?" a c'houlennas Fulup, estonet un tamm anezhañ.

"Din-me da gavout c'hoazh, met ma mamm 'zo chomet en aerborzh e-lec'h retom d'ar gêr, hep gallout reiñ tamm un displegadenn."

"A! Emaout tost arru, diskenn a ra an tram' dindan an douar. Chañs vat dit, ha vakañsoù mat!"

"Ya, kemend-all dit-te, Fulup. Ale, kenavo!"

Sellout a rae ar paotr ouzh Naig ac'h ae war-zu an dirri-tredan. Ne wele nemet he blev ruz e-touez ar veajourien stanket er stasion. Skritelloù a gemenne kantvet deiz-ha-bloaz krouidigezh an aerborzh. Ne chomas ket an tramway pell a-sav ha kenderc'hel a reas Fulup gant e veaj betek Konk-Leon da vont e bourzh an dourruzer a rae an treuzdougen etre an douar hag an inizi.

Naig a savas ken buan ma c'helle gant an dirri, betek sal vras an degemer. Ur wezh degouezhet eno e kavas un arvest dic'hortoz: bez' e oa ar veajourien o tougen klemm amañ hag ahont, rak nullet e oa an holl veajoù evit ar mare, ha dav oa d'an dud gortoz pelloc'h eget dleet. Nag a reuz!

A-greiz holl e spurmantas-hi ivez Iffig Skouarneg, paotr ar surentez, a selle a-gleiz hag a-zehou, daoulagad du gantañ, met muioc'h c'hoazh eget boaz. Mont a reas prim davetañ.

"Demat deoc'h, Aotrou Skouarneg, hag ar bed ganeoc'h?"

"Salud dit, plac'hig kaezh, deut out da welout da vamm, neketa? M'eus aon n'helli ket hen ober diouzhtu."

"N'hellin ket? Met perak 'ta n'hellfen ket?" a enebias Naig.

Iffig Skouarneg a dapas ar grennardez dre he brec'h ha lakaat anezhi da dreiñ warni he-unan. Neuze e tisplegas dezhi kement tra:

"T'eus ket gwelet an daou zen e-kichen an nor-dal, hag an daou all tost d'ar mekanik-bilhiji? Erruet int nebeut amzer araok ar Valum R 2 a zo er porzh, war an "tarmak", 'vel vez lâret. Reoù all zo c'hoazh, un tammig partoud, ha kejet o deus gant chef ar surentez. Urzh zo

bet roet d'an holl dilezel an tarmak, herzel an tremen ha gortoz."

Keit ma oa Iffig o kontañ an nebeud a ouie e taolas ar plac'h yaouank ur sell war ar re a hañvale bezañ spierien ijinet evit ur film bennak. Lunedoù-heol du a guzhe o daoulagad, mantili hir a skoache o izili. Sur oa Naig e tamwele un hezougig stag ouzh o skouarn dehou. Ne fiñvent ket, tres an disfiz a oa warne.

A-daol trumm e remerkjont penaos e oant bet tostaet didrouz gant unan all eus "paotred o lunedoù". Iffig en em lakaas etre Naig hag an den-se.

"Gant piv 'oc'h o komz aze, ha diwar-benn petra, evezhier... Skouarneg? " a c'houlennas hemañ a vouez izel etre e vuzelloù strizh.

### Trivet pennad

*Eno e vez kaoz eus ur "c'houviad" dianav gortozet gant un ofiser disfizius ha graet ur gavadenn estonus gant an Dimezell Jones.*

"O! Netra a bouez. Hem, Naig Jones an hini eo. Emañ he mamm o labourat en tour-kontroll. Hag evel-just en em c'houlenn Naig ha..."

"Jones, emezit-hu?" a droc'has an den. Hag hep gortoz ar respont e troas kein hag implij e hezougig-skouarn, un nebeud kammedoù pelloc'h.

Padout a reas ur pennadig, hag Iffig ha Naig en em daole selloù souezhet an eil d'eben. Er fin e tistroas paotr e lunedoù.

"Deuit ganin, Dimezell."

*"Jones, emezit-hu? Deuit ganin." Setu un den ne blij tamm ebet e zoareoù din. Ha heuliañ a rin anezhañ? Gwellomp...*

"Mont ganeoc'h, met da belec'h? Kas a rafet ac'hanon betek ma mamm?" a c'houlennas Naig, diskredig anezhi.

"Lâret 'm eus dit dont. Deus, neuze, ha tav."

Ne oa ket paotr e lunedoù e-unan diraze ken. Ur c'hamalad dezhañ a oa aze ivez, bremañ. Paotred solut ha bras e oant, kreñv ha tev o javedoù. Un danvez mousc'hoarzh a zeuas war o dremm, met ne oant ket kustum da vourc'hoarzh e gwirionez, anat deoc'h.

"Lezit anezhi da dont ganeomp, Aotrou Skouarnig." a lavaras an eil den.

"Mat, Aotronez. Ale, Naig, kerzh gante, hag arabat bezañ chalet. D'am soñj ec'h ez da vont d'an tour, a-benn ar fin... Kenavo ar c'hentañ!"

Ha setu Naig diwallet mat gant an daou "spierien" trema an nor a guzhe dirri an tour-kontroll. Pignet voe gante daou estaj hag en em gavjont dirak ur gward gwisket gant ar vantell hir adarre. Kontant oa Naig da gaout an dro-gaer da welout he mamm, met an anken ne dec'has ket, rak klevout a reas en tu all d'an nor a dostaent, un den o komz.

"Ur wech c'hoazh e c'houlennan diganeoc'h, Itron Jones. Na perak ho peus klasket pellgomz bremaik, daoust ma oa bet difennet seurt tra d'an holl labourerien amañ?"

"Ha respont a ran deoc'h ar pezh 'm eus lâret deoc'h dija, Letanant Braouezek..."

"Arabate c'hoari louarn fin ganin!" a grias an den. "Na rit ket Braouezek ac'hanon, a-hend-all e vo kaset keloù fall d'ho rener, d'ar prefed zoken, ha ne vo ket brav ar vuhez ken evidoc'h, kredit ac'hanon."

"Marteze, Aotrou. Reiñ da c'hoût d'am merc'h e vije dale ganin a felle din ober, ha setu toud. Ha ma kav deoc'h eo ganin eo bet darempredet ar mediaoù eus an trubuilhoù a c'hoarvez en aerborzh e faziit. Gant ar veajourien ne lâran ket."

Bez' e oa an den war-bouez kenderc'hel gant e zanvez-goulennata, pa voe lezet Naig hag he daou gomper da vont tre. Tevel a reas-eñ ha sellout ouzh ar grennardez a antree: ur plac'h yaouank, pevarzek pe pemzek vloaz anezhi

moarvat, gant daoulagad du-pod. Ne seblante-hi ket bezañ spontet gant ar pezh a wele.

En tour-kontroll en em gave evel kustum meur a zen o labourat. Met bremañ e oa teir gwec'h muioc'h eget boaz, rak skipailhad an noz hag hini an deiz a oa asamblez er sal, hag ar baotred kevrinus ken niverus all ivez.

"Setu an dimezell Jones, chef." a lavaras paotr e lunedoù da... chef e lunedoù."

Naig a reas ur gammed war-raok ha goude e chomas difiñv, he selloù bannet war-zu he mamm hag an ofiser un tammig pelloc'h. Azezet e oa he mamm diouzh he fost-kontroll ha darbet e oa bet dezhi krial pa oa degouezhet he merc'h er sal, met deuet e oa ar maout ganti chom hep lavarout ger ebet. Ar "chef", un den treut ha bihan anezhañ a vousec'hoarzh en un doare euzhus.

*Hemañ eo ar penn-bras, neuze. Hag un den disfius anezhañ, dreistmuzul zoken! Dalc'het en deus holl implijidi an tour el lec'h-mañ, evel en un toull-bac'h. Doareoù droch a zo gantañ: terroristed ne rajent ket gwashoc'h!*

Mont a reas Naig betek he mamm hardizh hag an div d'en em vriata, disammet un tamm anezhe. Roet nerzh evel-se an eil d'eben, e taoljont memes selloù du ouzh chef e lunedoù.

"Mat," emezañ, "marteze e vo furoc'h ar verc'h eget he mamm hag e lâro din buan perak ha penaos en em gav amañ?"

"N'am eus ket c'hoant da gomz ganeoc'h tamm ebet ; n'oc'h nemet un..." a zistagas Naig , met ar "chef" a dapas krog en e hezougig-skouarn ha sellout dre ar prenestr."

"Ya, Aotrou? Ya... Erru eo ar "c'houviad"?"

Gallout a raed gwelout gouleier-treñ ar motoioù ha kelc'hiet ganto ur wetur vras a yae fonnus davet ar Vulzun. Harpañ a reas ar wetur an tostañ posupl eus an egorlestrig hag un den a zeuas er-maez eus ar c'harr-tredan ha kerzhout dousig evel etre daou soñj betek beg ar fuzenn, digor evel genoù ur morvil. Tud all ac'h eas d'e heul, pres gante, malizennoù a bep tu, padal re all a rae an degemer er Valum R 2.

"Met, ar c'helenner Geiger an hini eo!" eme Naig dezhi he-unan, met klevet e voe gant an holl.

"Goût a rez piv eo?" a c'houlennas he mamm.

"Evel-just. Soñj 'teus eus an devezh 'm eus tremenet e Roazhon warlene da geñver skiantoù ar spered. Gantañ eo zo bet graet din test Bach-Sullivan. N'em bije ket kredet adwelout anezhañ araok mont marteze d'ar Skol-Veur."

Estonet an holl gant ar c'heloù e oa bet goulennet digant ur plac'h ken yaouank ober test Bach-Sullivan, diwar anvioù an daou skiantour o doa kenlabouret war ar pellsantout, an delepatiezh.

A-greiz holl e voe teñval pep tra dirak daoulagad Naig hag e kouezhas-hi war al leur, badaouet-mik.

## Pevarvet pennad

*Dihuniñ a ra Naig en ospital ha displeget e vez dezhi un darn eus ar pezh a zo c'hoarvezet en egor.*

"Naig, ha klevout a rez ac'hanon? Lâr din un dra bennak, pe voutj ur biz pe me oar me, mar plij!?"

Branwenn Jones a huanadas ur wezh adarre, dour a zerede en he daoulagad gant an dic'hoanag. Lakaat a reas he dorn e-barzh hini he merc'h a chome difiñv abaoe tri devezh dija. Start e oa eviti degemer alioù ar vedisined. Ya, kollet e oa hec'h anaouedegezh gant an dimezell Jones, er c'homa en em gave-hi, met perak? Den ne ouie c'hoazh. Ne oa ket bet skoet gant un taol-gwad pe ur c'holl-gwad. Pep tra a gerzhe mat gant he c'horf hag he empenn, nemet e kouske hag e kouske c'hoazh goude he fallaenn, dizehan.

Didrouz e oa er gambr, en ospital ar Morlu. Ne oa ket kalz tud o labourat eno e-pad ar vakañsoù, nemet marteze ar skipailhad a rae tro-dro servij ar gwallzarvoudoù. Trouz ar

gouelini a gleved, en tu all d'ar prenestr, ar gwelini a gave gwelloc'h klask o boued er poubellennoù eget war vor.

Dorn Naig a stardas hini he mamm, nerzhus.

"Naig?" eme Vranwenn, a-sav bremañ.

Digoret he doa ar verc'h he daoulagad hag hi klask kompren pelec'h edo. Sioul e oa, laouen ne oa ket he-unan en ul lec'h ha n' anaveze ket. Nag a denerigezh a voe etreze! Hag int ha chom ur pennad mut, skoaz-ouzh-skoaz.

"Mamm, pelec'h emamp? En ospital? Petra zo kaoz emañ gourvezet amañ?"

"Ur fallaenn 'teus bet tri devezh 'zo en tour-kontroll ha ne oas ket evit dihuniñ betek-henn."

"Tri devezh?!"

"Ya. Ken hir an amzer out chomet kousket, hag an holl amañ a grede e oas paket gant ur c'homa bennak, hep goût hiroc'h. Na pegen spontus eo bet din, ma merc'h, met bremañ out ez pleud en-dro, pareet moarvat. Dav eo gervel ar mezeg. O, na disammet on!"

Ar vezegez, an doktoez Lopez, a zisplegas penaos e oa bet degaset Naig da ospital ar Morlu gant tud ar polis, sañset, evit bezañ dindan evezh hag ober ar peadra dleet d'he fareañ. Ret vefe dezhi gortoz un devezh c'hoazh araok distreiñ d'ar gêr, rak dav oa ober dielfennoù all ha bezañ sur e oa mat pep tra ganti. Hag ec'h eas ar vezegez kuit.

O-unan o devoa neuze merc'h ha mamm amzer da gaozeal asamblez ha Naig a zeskas evel-se an darvoudoù pouezusañ n'he doa ket bet tro da c'houzout araok.

Ar Vulzun a oa aet kuit davet Eurosterenn hag ar wetur implijet evit ar c'helenner Geiger a voe bet kemeret a-c'houde da gas Naig d'an ospital. Etretant e oa bet jeu bras er mediaoù gant afer ar Vulzun hag al "letanant Braouezeg" en doa bet e begement, rak ma oa bet roet an urzh dezhañ *diogeliñ* an aerborzh, ne dalveze ket kement ha lakaat an dachenn-se dindan al lezenn-vrezel.

"Ha tro 'teus bet da gelaouiñ Tad?" a c'houennas ar verc'h.

"Klasket 'm eus mont e darempred gantañ, met bewech ne oa ket evit respont, war seblant. Petramant n'hellen ket tizhout pellgehentrez Eurosterenn zoken. Sur a-walc'h abalamour d'ar journalisted a labour war darvoud an aerborzh. Siwazh."

"Ya, Mamm, siwazh." a eilgerias Naig, pa ziflukas un infirmierez.

"Itron Jones? Bez' eus un aotrou hag a fell dezhañ komz ganeoc'h diwar-benn ho pried. Ha leuskel a ran anezhañ da weladenniñ ac'hanoc'h?"

Souezhet e voent o div er gambr. Koulskoude e respontjont a unvouezh d'an infirmierez ober evel kinniget. Dont a reas un den ha ne oa ket ken dianav-se war-wel: hemañ o doa bet tro da welet e-touez paotred o lunedoù. Skrabañ a rae e varv en ur vont tre ha lakaat e lunedoù e-barzh godell e vantell hir.

"Salud deoc'h, Itron ha Dimezel Jones. Kejet ho peus ganin dija, nevez 'zo. Durand vez graet diouzhin, Jean Durand. Labourat a ran evit ar gouarnamant. Digarezit ac'hanon, me ho ped, ma kavit dichek dont da ambetiñ ac'hanoc'h ken abred goude *distro* an dimezell Jones, met gallout a rafemp goût un nebeut traoù resisoc'h."

Gortoz a rae a-sav diraze, ur c'harnedig-paper en doa tennet eus godell diabarzh e vantell, ha serret an nor. Diskouez e reas e felle dezhañ azezañ war ar gador dirak ar prenestr hag asantet e voe dezhañ henn ober.

"Bon! Branwenn Jones oc'h-c'hwi, daou-ugent vloaz, kontrollouez-aer e Gwipavas, ganet e Kemper, dimezet gant Alan Jones, daou vloaz ha daou-ugent, major, merdeour war Eurosterenn, ganet e... Pondi, ur verc'h, Naig Jones, er gambr-mañ, trizek vloaz, skoliadez e Skol ar C'hirri, Brest, ganet e Brest." eme *paotr ar gouarnamant*, e vizied en e varv adarre, "N'on ket faziet?"

"???... N'oc'h ket!" a respontas an itron Jones, eston ganti.

"Penaos ouzoc'h se, 'ta?" a c'houennas Naig un tammig kounnar enni.

"Ac'hanta, ma labour eo just a-walc'h goût titouroù a bep seurt diwar-benn an dud, Dimezell Jones. Met kendalc'homp, mar plij, nemet ho pefe tra pe dra da resisaat. Netra? Mat! Dimerc'her diwezhañ, da greisteiz nemet c'hwec'h he deus kollet an dimezell Jones he anaoudegezh evit an eil gwech er sizhun, hag hi chomet mod-se betek hiziv, div eur ha kart goude merenn."

Re oa re evit Branwenn Jones.

"Met perak e vezomp spiet ganeoc'h? Ha graet hor defe un torfed bennak, d'ho soñj, Aotrou Dupont? Laeret un ti-bank, lakaet ur vombezenn da darzhañ? Me 'soñje din e oac'h deut da zivizout a-fed ma fried." eme Vranwenn Jones. "Ne rit nemet lakaat ac'hanomp diaes."

"Durand. Bezit dinec'h, tudoù, sed aze dalc'h ma displegadenn: deut on davetoc'h evit reiñ keloù deoc'h, ha n'eo ket evit "spiañ" ac'hanoc'h, nann 'vat. OK? Taolit pled, neuze, ha diwallit nompas bezañ re souezhet gant ar pezh 'm eus da lârou deoc'h bremañ, daoust pegen dic'hortoz eo."

Sevel a reas Jean Durand, ha lezel e varv e peoc'h evit ar mare. Ne denne lagad ebet diwar Naig. Honnezh hag he mamm a selaoue, dever enne.

"Ar merdeour Alan Jones, e kefridi tro-dro d'al loar, a zo bet paket gant ur fallaenn," a grogas paotr ar gouarnamant, hag ober un ehan araok echuiñ e frazenn, "... dimeurzh d'an noz, da nav eur hanter."

Paouez a reas neuze ur pennadig, amzer dezhañ da zielfenniñ emzalc'h an div blac'h dirazañ. Ar re-mañ o doa pezhioù daoulagad bras dezhe, rak un taol degouezh souezhus-kenañ oa. Met c'hoant bras o doa klevout penaos edo kont gant tad Naig. Ar vamm a gasas ar c'homz da vont en-dro.

"Met petra 'zo c'hoarvezet gantañ, Aotrou Durand? Echu eo gant e fallaenn bremañ, neketa?"

"N'eo ket, Mamm. N'eo ket." eme ar plac'h yaouank, azezet war he gwele-ospital.

"Hem. Gwir eo ar pezh a lâr ho merc'h, Itron Jones. Dedennus-tre, dedennus-tre... Emañ

bepred er c'homa, met, penaos din-me, skañvoc'h stad e goma abaoe m'eo dihunet ho merc'h, sed aze ar gemennadenn 'm eus bet un hantereurvezh 'zo."

Treiñ a roas ur pajenn eus e garned.

"Adkroget en deus da huñvreal, goude tri devezh er c'homa don ha dishuñvre. N'hellan ket displegañ sklaeroc'h an traoù, na lec'h na kaoz e fallaenn, ha forzh penaos n'em bije ket an droet. Dav eo din lârou kenavo deoc'h, met tro hon do d'en em adwelout, 'm eus aon, hag a-benn nebeut amzer."

Hag ec'h eas kuit hep lavarout grik.

### **Pempvet pennad**

*Eno e tizolo hon harozez planedenn he zad ha kinniget vez dezhi ober ur veaj ha n'eo ket aotreet d'ar re yaouank normalamant.*

D'an deiz war-lerc'h e teuas Naig er-maez eus an ospital, goude un enselladenn ziwezhañ gant ar vezegez. Ar vezegez Lopez ne gavas netra a harzfe ar plac'h yaouank da return d'ar gêr. Poent oa dezhi bremañ profitañ eus he vakañsoù ar gwellañ ma c'hellfe, hervezi. Met vakañsoù ar baour gaezh ne grogent ket mat tamm ebet: ur gwallhuñvre e oant kentoc'h!

Ret eo anzav n'he doa ket resevet keloù nevez eus he zad, ar pezh a lake anezhi da vezañ strafuilhet un tammig, met keñveriet gant anken he mamm ne oa hon harozez tost nec'het ebet. En he c'hreizon e sante ne oa ket he zad en arvar, daoust ma n'helle ket displegañ he santimant.

Betek un abardeiz, pa sonas unan bennak ouzh dor ar ranndi. Naig eo a zigoras an nor, he mamm d' he heul. Diraze e weljont an aotrou Durand hag un den all, kalz yaouankoc'h egetañ. Ne oa re lunedoù ebet gante, ar wezh-mañ, a remerkas Naig.

"Lâret 'm boa deoc'h ne vefemp ket chomet pell hep en em rankontrañ adarre, Itron ha Dimezell. Ha gallout a rafemp divizout asamblez war un dra a-bouez evidomp-ni holl?"

Ur wezh deuet e-barzh ha prennet mat an nor, e voent degemeret er sal-bennañ, a oa kegin kenkoulz ha saloñs. An aotrou Kelvin eo, skoazeller ar c'helenner Geiger, a oa deuet gant Jean Durand. Kroget e oa o c'hoan gant ar re Jones, ur saladenn ruz ha Makkrapouezh gant ur voutailhad sistr dialkool. Ha c'hoant o doa ar weladennerien da zebriñ un draig gante? Trugarez, met n'o doa ket, met ur banne a yafe gante, tomm oa c'hoazh an amzer d'an ampoent. Lazhet e voe ar skinweler-moger, pres war ar merc'hed selaou ar c'heleier a zegase an daou all gante.

"Ha neuze, Aotrounez, petra nevez?" eme Vranwenn, en ur servijañ ur vras a werennad Avaloo gant ur skornennig da bep hini anezhe. "Mont a ra gwelloc'h an traoù gant Alan?"

"Na welloc'h, na washoc'h, Itron, met aotreet omp bet da zisplegañ deoc'h toud ar pezh a ouzomp. Fallaenn ho pried n'eo ket c'hoarvezet drezañ e-unan, met un... ur *grouadurez* a zo e kaoz." a lavaras paotr e lunedoù kuzhet. "Ur grouadurez bet kavet en egor gant skipailhad ar merdeour Jones, ha n'ouzer ket eus pelec'h e teu."

"N'oc'h ket o kemenn deomp eo un... *egoriad* en deus lakaet Alan er c'homa?!" a enebias ar vamm, feuket anezhi, "Digredusaat tra 'm eus bet tro da glevout em buhez. N'on ket evit anzav hiroc'h seurt koñch..."

"Kompren a ran ho emzalc'h, Itron Jones," a droc'has an aotrou Kelvin, "met gwir eo, gwir penn-da-benn. Me ivez, pa zo bet lâret kement-se din, ne ouien ket petra krediñ. Met ar c'helenner Geiger en deus displeget memestra din ha n'eo ket un den a gontje gevier, anat deoc'h."

*"Ur grouadurez... kavet en egor... e kaoz..." Un egoriad? Dibosupl! Ha koulskoude eo sklaer splann din e lâront ar gwirionez. Met perak on dihunet neuze, pa chom Tad er c'homa?"*

"Perak omp bet paket ma zad ha me gant memes fallaenn? Ha perak n'eo ket dihunet ma zad er memes koulz ha me? Penaos e tisplegit-c'hwi an dra-se?" emezi.

Dizoloet e oa bet ur seurt egorlestr dianav gant skipailhad ar major Jones war al loar, en tu

kuzh anezhi, un egorlestr bet o paouez peñseañ evit doare. Da gentañ hag a-bell o doa kredet e oa ur pimpatrom sinaeg pe amerikan, met a-dostoc'h e oa deuet dezhe ar soñj ne oant ket dirak nevesañ ijinadenn-egor Mabden.

Ne chome nemet darnoù eus an egorlestr, devet, distrujet, bruzunet. Daoust da se e tizoloas ar serjant Monod un dra hag a hañvale bezañ ur sac'h gant e sac'had ennañ. Dizaon en doa klasket digeriñ anezhañ, met kerkent e oa lammet er-maez ar grouadurez daonet ha taget he doa ar serjant gant feulster ul loen ferv. Hep sikour ar major Jones e vije bet lazhet ar paour kaezh soudard.

Met neuze eo Alan Jones a oa bet kroget ennañ gant an euzhvil gouez. Gellet he doa ar grouadurez vil-se toullañ gwiskamant-egor an ofiser kalonek gant he skilfoù lemm ha siket anezhe en e zivrec'h, klasket he doa ivez dantañ anezhañ, met saveteet e oa bet gant e zafar-analiñ, daoust d'ar mekanik damderriñ e kreiz ar stourm. D'ar poent-se e oa c'hoarvezet un dra iskiz: ne fiñvas ket al loen-egor ken, met koll a reas ar merdeour e anaoudegezh hag e chomjont stag an eil ouzh eben, den reuzeudig ha krouadurez spontus.

Bev e oant atav, ha ret oa gortoz distreiñ e bourzh egorlestrig ar skipailh araok gallout dieubiñ ar major Jones, met hemañ a oa er c'homa diwar neuze, ar pezh a hañvale bezañ ken gwir all ivez evit ar monstr milliget.

En aner o doa klasket goude medisined Eurosterenn dihuniñ Alan Jones, met ar grouadurez eo er fin a oa dihunet er memes koulz ha Naig.

"Bremañ ouzoc'h ar pezh zo bet kontet din gant ar serjant Monod p' am eus kejet gantañ derc'hent dec'h, goude e zistro war an douar-patatez-mañ gant ar Vulzun." eme Jean Durand, hemañ kroget adarre da flourañ e varv evel kustum.

"Evit lâroust fraezh an traoù," a gendalc'has an aotrou Kelvin, "omp deut, ar c'helenner Geiger ha me, d'ar meno e c'hellfe an... egoriad bezañ mestr war empenn ar major Jonas, respet deoc'h, hag e lakfe anezhañ da venel kousket er c'homa."

"Met daoust da betra ken euzhus a dra!" a estlammas Branwenn Jones, "Perak eo kouezhet

war ma fried ar blanedenn spouronus-se ha n'eo ket war unan all?"

Naig a verzhas korf he mamm o krenañ ken a rae. Dorn ar verc'h war chouk ar vamm a sioulas he stad.

"Ur blanedenn spouronus, emezit-hu, Itron Jones? Evel-just, met en ur mod n'eo ket... fall eo war... ho kwaz emañ." a respontas Jean Durand, met ne oa ket fier anezhañ.

"Pebezh divergont! Nag ar vezh komz evel-se d'am mamm!"

"Digarez, ne felle ket din feukañ den ebet."

"Klevet ho peus komz a-zivout test Bach-Sullivan, neketa?" a c'houlennas an aotrou Kelvin, daoust ma ouie ar respont en araok.

"Graet eo bet din warlene. Perak?" eme Naig.

"Mat. Neuze ouzoc'h eo bet roet un notenn vat d'ho merc'h war skeul Bach-Sullivan, Itron Jones. O! N'eo ket an notenn wellañ bet kavet er vro, met unan vat memestra, kalz uheloc'h evit ar geidenn, ya, sur."

Gant ar gerioù-mañ e voe cheñchet penn d'ar gaoz evit ur pennad. Deuet e oa ar skoazeller Kelvin a benn da dizhout e bal. Bremañ e oa tu dezhañ kas e gefridi betek penn, marteze. Plantañ a reas e selloù e daoulagad Naig.

"Vel 'm oa lâret bremaik, e soñjomp emañ spered da dad dindan gazel-ge ar grouadurez abaoe o emgann war al loar. Te ivez a zo bet taget, rak ul liamm bras zo etrezoc'h, da dad ha te, abalamour ' teus... ul live uhel e telepatiezh. Ur chañs eo evidomp: setu perak omp deut da welout ac'hanout."

Huanadiñ a reas araok kemer nerzh da lavarout abeg e weladenn ti ar re Jones, met ar plac'h he doa komprenet dija.

"Me, kejañ gant an euzhvil? Sed aze ar pezh ho peus c'hoant a rafen-me?!" emezi, berr warni.

"James, klevout a rit," a huchas he mamm, ruz he daoulagad, "james ne laerfet ma merc'h

din! Laeret ho peus ma gwaz, he zad, ne rafet ket muioc'h! Kenavo! D'an diaoul ganeoc'h!"

Ha setu Branwenn Jones war-sav dirak an daou baotr, ar voutailh Avaloo hejet ha dihejet war-zu fri an eil ha fri egile. Ar re-mañ a gilias ar buanañ ma c'hellent, met ar skoazeller a stokas gant ar sofa ha kouezhañ war al leur.

"Forzh ma buhez! Truez, Itron!" emezañ, e benn koachet etre e zaouarn, "Komprenit ac'hanomp mat, n'eus den all evit ho merc'h er bed gouest da saveteiñ ho pried."

"Abalamour da se e c'houlennomp diganeoc'h asantiñ ec'h afe Naig da genlabourat gant ar c'helenner Geiger war Eurosterenn." a gendalc'has paotr ar gouarnamant."Ur goulenn savet a-berzh ar stad eo. Ma ne rit ket se nag evit ar vro, nag evit ar skiant - hañ, Aotrou Kelvin? - grit kement tra evit ho kwaz hag evit ho tad."

"Pennoù-chas ac'hanoc'h!" eme Vranwenn en ur lezel ar voutailh da ruilhañ war tapis ar sal.

Naig Jones a dostaas ouzh he mamm.

"Mont a rin da sikour ma zad."

## C'hwec'hvet pennad

Degemeret e vez an Dimezell Jones e bourzh ur Vulzun vihan evit ur veaj betek ar porzh-egor europat hag anduriñ a ra an diaezamantoù-korf gouzañvet pa ranker dilezel an Douar hag e nerzh-dedennañ.

Ne oa ket savet an heol c'hoazh pa erruas mamm ha merc'h Jones war tarmak an aerborzh, an aotrounez Kelvin ha Durand d'o heul, daou zevezh goude an diviz taer er rannidi. Un emgav all o doa bet tro d'ober abaoe er pefedi ha siouloc'h e oa an darempredoù etreze bremañ.

An egorlestrig a c'hortoze war tachenn douarañ-dizouarañ an aerborzh a oa kalz bihanoc'h eget ar Vulzun: un Delfin Z-300, hervez paotr skrab-e-varv. Ne seblante ket bezañ nevez-flamm ken gant e ardamezioù dilivet, met



e stad ne oa ket da rebech dezhañ avat. Klevout a reed ar c'heflusker o treiñ.

"Sell 'ta piv zo du-hont, Naig!" eme an itron Jones.

"Al letanant Braouezek, nag un eston!" a eilgerias Naig a vouez uhel.

"Al letanant Marzhin an hini eo, e gwirionez." a chuchuas an aotrou Durand ha mont davet e chef a gammedoù hir.

An dud a saludas (nemet Mamm Naig ne saludas ket al letanant Marzhin) ha displeget piv oa piv, daoust ma ouie pep hini anezhe piv e oant dija.

Nann, ne oant ket bet heuliet gant den ebet, daou gazetenner o doa klasket tremen dreist ar gleud, met tapet e oant bet gant ar surentez ha lammet dezhe o ardivinkoù-luc'hskeudenniñ infraruz hag all. Ya, gouzout a ouie Naig e ranke lakaat ur gwisk ispisial. Nann, n'he doa ket aon ha hervez ar vezegez Lopez e oa gouest Naig d'ober ar veaj ha damechu kresk he c'horf ouzhpenn, ne oa dañjer ebet eviti.

Galvet e voe neuze an aotrou Kelvin ha Naig da bignat gant ar skeul en Delfin. Stardet an dorn an eil d'egile ha d'eben (nemet Branwenn Jones gant al letanant Marzhin), ur pok flour war divjod Naig gant he mamm, ha skoazeller ar c'helenner Geiger ha sevel betek an nor un nebeud metrad a-uz d'an douar, Naig war e lerc'h. Unan bennak a roas dorn dezhe da vont tre hag ec'h ajont diwar-wel.

"Degemer mat e bourzh an Durzhunell, tudoù, Mikael Albert eo ma anv, met graet vez Mike diouzhin." a lavaras dezhe an den a serre an nor-aer.

"Salomon Kelvin, skoazeller ar c'helenner brudet Geiger, pelec'h emañ ma flas?"

"Amañ a-gleiz, ma c'hilhog yaouank, gant da wiskamant-egor prest da vezañ lakaet." eme Vike hep sellout outañ. "Ha te, plac'hig koant, ar wech kentañ eo din kejañ ganit ha koulskoude em bije gouvezet diouzhtu piv out. Daoulagad ha mousc'hoarzh fentus da dad zo ganit ivez. Deus dre amañ 'ta hag e tiskwelin dit penaos lakaat da wisk."

Bez' e oa daou zen all er sal-vleniañ, Raissa Legrand, pilotez, ha Jord Kervella, merdeour. Azezet e oant e penn-araok ar pezh bihan, kadorioù-beaj an daou gouviad a-dreñv dezhe gant hini Vike. Hemañ a oa paotr ar c'heflusker. Graet e voe anaouedegezh buan-buan, rak sañset e oant da zizouarañ a-benn dek munut nemetken. Dizale e oa prest Naig, he gwiskamant-egor lakaet reizh ganti he-unan pe dost: un dra nevez a oa eviti kaout seurt harnez, met graet he doa evel ma oa bet desket dezhi gant he zad bloavezhioù zo dre gomz hepken. Ne oa ket bet plijus ar gentel-se d'ar mare-se, met bremañ e serjije a-benn ar fin. An heuzoù hir a starde he divhar evel dleet, a-enep flusk ar gwad e-pad al loc'hañ, ar buanaat pe an difounnaat, pe c'hoazh ar cheñch-penn d'an egorlestrig.

"Petra 'mout oc'h ober? Ar wech kentañ eo dit beajiñ, Salomonig kaezh?" eme Vike.

"Sikourit ac'hanon, n'eo ket ma micher en em wiskañ gant un hobregon!" a enebias an aotrou Kelvin.

"Sell! Ar gabell a lakez 'vel-se... Hag amañ... Nann 'ta! Stard ha... ya, mat eo. 'Teus ket ezhomm eus tuellenn ar voutailhad aer, ne servijje nemet ma vije un toull en Durzhunell. Met tap diouzhtu ar sac'h-mañ ma n'em santez ket n'ez pleud bremaik ha n'ez ket da louzañ ma Zurzhunell."

Edo Salomon Kelvin o vont da glemm ha da c'houlenn digarezioù pa voe troc'het gant mouezh al letanant Marzhin o c'hervel skipailhad an egorlestrig.

"Tour-kontroll da Zelfin. Prest oc'h?"

"Delfin da dour-kontroll. Emaomp kaji echu gant ar check-up, goulenn a reomp an aotre da loc'hañ a-benn munut." a respontas ar bilotez.

"Aotreet. Pemp munut."

"Ale, Mike, startijenn dezhi bremañ!"

"Graet eo." eme paotr ar c'heflusker.

Trouz ar c'heflusker a savas kreñvoc'h hag ar sistem dre-zour er c'hadorioù-egor a leunias

ar goullou tro-dro d'ar c'horfoù. Pare e oa ar skipailhad.

"Dek, nav, eizh, seizh, c'hwec'h, pemp, pe'r, tri, daou, un', loc'h!"

"Loc'hañ!"

Un trouz iskiz a glevas Naig, un trouz skrijus hag tamm-ha-tamm e kavas dezhi he doa kollet he c'hempouez: o kouezhañ edo! Met ne gouezhas ket. Rolletoc'h-dirolletañ e voe en he fenn ha keit ma save an Durzhunell war-zu an oabl evel un tenn ma soñjas dezhi bezañ e strad ur vagig e-kreiz ar mor rust, droug-mor ganti. Heugus e oa!

D'ar memes poent e sankas he c'horf muioc'h c'hoazh er gador: n'helle ket fiñval ken. Santout a reas he c'horf a-bezh pladet, flastret gant nerzh-dedennañ an Douar. Dav voe dezhi serriñ he daoulagad gant ar boan enne. Met ne badas ket pell, rak darn vrasañ energiezh ar c'heflusker a groue un eneb-nerzh d'an Douar hag a-benn nebeut amzer ez eas gwelloc'h ganti, ken skañv ma 'n em sante. Kuit an heug? Ket, pas diouzhtu, met dont a zeuas mestr warnañ er fin.

*"Ma fenn! Ec'h! Darbet eo din beuziñ... C'hoant dislonkañ am eus bet, tremenet eo bremañ. N'eo ket war vag 'to seurt fallamzer, Fulup! Ar re all n'int ket bet lakaet diaes... A? An aotrou Albert n'eo ket laouen, sevel a ra d'am gwelloc'h? Ket! O, an aotrou Kelvin o klask war e sac'h... Re ziwezhat."*

### Seizhvet pennad

Lec'h ma ra hon harozez ur weladenn zisplijus d'he zad gant an Aotrou kelenner Geiger hag hi lakaet diaes bras dirak ar grouadurez.

Liv fall a oa c'hoazh gant ar skoazeller hag e zivhar a oa dinerzh pa dremenas eus bourzh an Durzhunell da hini Eurosterenn. Grozmolat a rae ken a c'helle: perak e oa kement a ziaezamant en egorlistri, ken nebeut a blas hag all, hag all. Jahinerezh e oa, avat. Ha paotr ar c'heflusker ha respont dezhañ, imoret fall gant ar stlabez graet gant dislonkadenn Salomon Kelvin, penaos e oa

bremañ kant gwec'h muioc'h a blas en egorlistri eget er fuzeennoù ar c'hantved tremenet pa geñveried ar ment: bihanoc'h e oant, netra ken. Padout a rae ar veajoù kalz nebeutoc'h a amzer eget gwechall gant an ijinoù eneb-nerzh ha marc'hatmatoc'h e oa. Met ar paour kaezh aotrou Kelvin ne oa ket evit selaou.

Naig hag ar skoazeller Kelvin a laoskas neuze Raissa ar bilotez ha Mike ar mekanisian hag ec'h ejont da heul ar merdeour davet an degemer tostañ. Aze e oa tud o c'hortoz anezhe.

"Degouezhet an dremenidi, Sir!" eme Jord.

"Deus ar gwellañ, ofiser, bez e c'hellit mont da sal ar rentañ-kont evit ho peaj prestamant. Ober a rafomp-ni bremañ tro-dro d'hon daou gouviad nevez." a lavaras un den gant e wiskamant soudard ha kas ar skiantour hag ar plac'h gantañ davet an daou zen all en degemer. "Ar c'horonal Guareschi on-me, rener an Eurosterenn, degemer mat a hetan deoc'h ho taou. Ha beajet mat ho peus?"

"Ya, pezh a sell ouzhin," eme Naig en ur vousc'hoarzhin, "met diaesoc'h eo bet evit an aotrou Kelvin."

"Kompren a ran. N'eo ket grevus, Aotrou! Mont a rayo gwelloc'h ganeoc'h tuchantik, gwelout a rit. Mat, dav eo din presañtiñ an dud amañ, neketa? Ar c'habiten O'Brian, mezeg-meur ar porzh-egor, hag ar c'helenner Geiger, anavezet gant an holl. An dimezell Jones, merc'h ar major Jones, an aotrou Kelvin, skoazeller an aotrou kelenner, met goût a rit an traoù-se dre vras dija."

Ha kroget e voe gant ar saludiñ. Hag ar bed ganeoc'h? Mat... ar jeu? Salud deoc'h! Hag all, hag all. Ar c'helenner a sachas ar c'homz pelloc'h ha hemañ ha koñfortiñ ar veajourien evel hen:

"Bez dinec'h, Naig, mont a ra mat an traoù gant da dad, daoust dezhañ bout kousket bepred. Kavet vo an doare d'e zihuniñ, sur on."

"Trugarez deoc'h, Aotrou kelenner, ober a rin ma seizh gwellañ evit sikour pareañ anezhañ, met n'ouzon ket penaos." emezi.

"Kavet vo an tu, Naig, kavet vo. Met daomp da weladenniñ da dad, hañ? Ha c'hwii,

Kelvin, arabat eo chom en disesper: spontus eo bet din ober ar veaj er Vulzun ha bremañ emañ em bleud en dro. Memestra vo ganeoc'h, ha buanoc'h evidon, m'henn asur, n'oc'h ket ken lard ha me, ac'ha!"

Ar c'helenner a oa un den en tu all da dri-ugent vloaz, moal un tamm, gant blev louet rodellek. Bihan ne oa ket evit gwir, met tev ha piltosek evel ur gorilh. E zaoulagad, lirzhin atav, a luche pa selle a-gostez. Salomon Kelvin a hañvale d'ur skribiton en e gichen.

Asamblez gant O'Brian ec'h ejont dre an trepasioù, tremen a rejont dorioù karter an ospital hag e harzjont dirak ar gambr 14. Eno en em gave tad Naig, gourvezet war ur gouskedenn gwenn-kann ha goloet gant elektrodennigoù bihan. Naig a yeas davetañ, he spered hejet etre levenez hag anken.

Ar re all a laoskas anezhi e peoc'h ur pennad, kaozeal a rejont en trepas da c'hortoz fin an emgavedigezh. Pa zistroas ar verc'h gante, un daer e korn he lagad, e kemenas dezhe he nec'hamant .

"Kontant on pa welan ne seblant ket bezañ gloazet fall, met ne gomprenan ket un dra spontus a santan em c'hreiz: aze emañ e gorf, met evel ne vije roud ebet eus e spered. Ur grogenn c'houllo! Perak, 'ta, met perak?" a c'houlennas ha kregiñ da leñvañ.

"Ale, ale, plac'hig!" a lavaras ar c'helenner Geiger, ha hemañ en doa tapet anezhi etre e zivrec'h evit reiñ kalon ha teneredigezh dezhi. "N'eo ket er stad-se vez da dad ordiñ. Pa gousk ar... grouadurez e vez spered da dad gantañ, me lâre dit, zoken ma n'omp ket deut a-benn da gas dezhañ e anaoudegezh c'hoazh. An dra-se hon eus merzet ivez, gant sikour O'Brian. Dihun eo an egoriad, setu toud."

"Aotrou kelenner," eme Salomon Kelvin, "marteze e c'hellfemp kregiñ diouzhtu, ne gav ket deoc'h?"

"Amzer zo, Kelvin. Gwell eo gortoz ma vo kousket an egoriad." a enebias ar c'helenner Geiger. "Pegoulz dija, O'Brian?"

"A-benn un hantereurvezh ma ne fazian ket, rak ingal eo gant egile." a respontas ar mezeg.

"Gant egile pe gant eben," a gendalc'has ar skiantour, "n'ouzomp ket c'hoazh pe seks eo."

"Ha petra ouzoc'h a-fed ar grouadurez he deus lakaet ma zad er stad truezus-se?" eme Naig Jones.

"Pezh a sell ar vevoniezh," eme O'Brian, "e c'hellomp lâre he deus gwad tomm evel dompni, ul loe... hem, ul loen bronnek eo, gant divesker, da laroùt eo divrec'h ha divhar, un danvez lost bihan-tre, mourroù hag blev glas arazh ur c'hroc'hen tev war holl ar c'horf. Neuz ur meskaj etre un den hag ur reunig, respet deoc'h. Kousk a ra muioc'h evidomp, debriñ a ra a-bep seurt, met kriz kentoc'h. Ha diwar an dielfennadurioù hon eus graet e ouzomp he deus ivez ur framm karbonek, ouzhpenn pevar-ugent vloaz moarvat hag un tammig re a oksigen zo en hon aer eviti marteze, netra grevus, boazet eo da vevañ en dour kenkoulz hag er-maez, dindan kaji memes nerzh-dedennañ evit war an Douar. Ya, Geiger?"

"Bon, evel-just n'eo ket ul loen diskiant ar grouadurez-se anezhi. Emaomp bepred o klask sevel ul langaj dre arouezioù d'en em intentiñ. Dont a ra brav gantañ - pe ganti -, met pell emañ e gazez da Yann c'hoazh, rak ne c'hoanta ket kalz eskemm ganeomp. A-hend-all eo sklaer splann deomp eo kad da implij e spered da lakaat unan bennak - ar Major Jones da skouer - dindan kazel-yev ma touch anezhañ. Setu perak eo bet lakaet ar pellsanter-se en ul log ispisial ha difennet ar mont e-barzh."

"Ur pellsanter!" a estlammas ar grennardez.

"Ya," eme Salomon Kelvin, e zaoulagad entanet, "ur pellsanter, hag unan barrek, n'eo ket marteze! Gant da sikour, Naig, e vefomp ar re gentañ er bed a-bezh a zizolioio kevrin ar pellsantout. Kompren a rez?"

"Deut on evit ma zad! N'eo ket evidoc'h hag ho prud!" a grias Naig, he fronioù digor bras gant ar c'hounnar a save enni.

Chom a rejont a-sav hep fiñval un eilenn pe div, amzer d'an holl da sioulaat. Goude-se en em zigarezas ar skoazeller hag ar c'helenner a lavaras da Naig e oa fouge ur bugel gant ar

skiantour yaouank. Ar gudenn-se a yafe kuit gant ar bloavezhioù hag ar skiant-prenet.

Met deuet e oa ar poent tizhout log al "loen". Ar vandennad a gemeras an hent betek tu all karter an ospital, dirak un nor ziwallet gant unan bennak. Mont a rejont er pezh neshañ, lec'h ma oa ur prenestr ken ledan hag ar pezh hag a selle er pezh all.

"Amañ e welomp anezhañ hep bezañ gwelet." eme O'Brian, "Arabat eo deoc'h ober re a drouz memestra... Sellit! Petra 'm oa lâret? Kousket eo."

Ar plac'h yaouank a dortas araok treuziñ an nor, met gant un hir a daol-anal e teuas e-barzh.

Er pezh en tu all d'ar voger treuswelus e oa kempennet pep tra evel en ur gabinenn all, nemet daouhanteret e oa bet ar gambr gant ur gael houarn soudet nevez zo, ur prenn dezhi. Tamolodet war ur gouchenn e welas-hi ur c'horf o kousket.

*Setu tager ma zad. Souezhus! Brasoc'h em boa kredet e vije. Penaos soñjal e c'hell ur grouadurez ken sioul bezañ un danvez muntrer anezhi? O! Fiñval a ra er c'houisk... Ket! O tihuniñ emañ, o ma Doue!*

Astenn a reas an egoriad e zivesker evel evit gounit startijenn enne hag a daol-trumm e tigoras e zaoulagad, bannet e selloù iskiz war-zu ar voger ispisial, dres war-zu ar grennardez, met stumm an den dall. Ha d'ar memes koulz e voe paket an dimezell Jones gant mennozhioù estren ha mesket.

*"Pelec'h? Soñj din! Petra zo? Peoc'h! Din-me bremañ... Ya! Amañ emañ! D'az santout a ran! Da spered tost diouzh ma hini! Disheñvel ha tost dezhañ... Din-me? Peoc'h! Chom em strad!" Emañ em fenn, klask a ra goût piv on ha... "Ya, reizh! Yaouank... parez, Naig. Ma merc'h?! Peoc'h! Ya, evel da... dad?!" A! Ne santan ket anezhañ o tebriñ em spered ken. Nag euzhus e oa! Nann! Distro eo! "Merc'h yaouank, deus! Deus ganin, arabat... Chom! Pellaat zo fall! Pellaat zo... Pellaat... Pell..." Hou! N'emañ ket ennon ken? Dieub on?*

## Eizhvet pennad

Displeget e vez un dra iskiz gant ar c'helenner Geiger ha diskouez a ra Naig bezañ kalonek.

Ar c'horonal Guareschi a lakaas un tasad te tomm war an daol dirak plac'h he blev ruz hag aliañ dezhi evañ ur banne araok kenderc'hel gant he istor. Mousc'hoarzhin a reas-hi ha lonkañ an evaj goustadig. Ur wezh echu he zasad ganti e verzas edo an holl o sellout outi didrouz: ar c'horonal, ar mezeg, ar skoazeller hag ar c'helenner, war evezh.

Geiger a oa an hini nemetañ ne seblante ket bezañ pres warnañ, ar re all o doa poan chom hep goulennata ar grennardez, dreist-holl Salomon Kelvin, liv fall gantañ adarre.

*Ne ouien ket e oa hemañ un danvez pellsanter anezhañ. Gwellañ hini ar vro zoken! Hag ar c'helenner Geiger: memestra pe dost... Pellsantet o deus mennozhioù egile, perak n'int ket bet intentet gante, neuze?*

"Me gav din e oa ur seurt stourm er mennozhioù am eus klevet, evel etre daou... zen. Unan a zo deut mestr war egile ha dizoloet en deus ma anv." emezi.

"Ha lâret en deus merc'h diouzhit, Naig, sur out?" a c'houlennas ar c'helenner dousik.

"Ya..." a grogas ar plac'h, ha kenderc'hel goude un ehan, "... ha perak en deus graet, d'ho soñj? Hag-eñ en defe gouvezet an dra-se gant ma zad?"

"Marteze, marteze. Petramant eo da dad en deus klasket gervel ac'hanout drezañ."

"A gav deoc'h?" eme Naig.

"A gav din, ya. Ur vartezeadenn eo, met kement-mañ a sinifije eo bev e spered laeret dezhañ."

"Ret eo dezhañ kaout anezhañ en dro!" a lavaras Naig, a-sav bremañ. "Mar plij!"

"N'ouzomp ket c'hoazh penaos e c'hellfemp kaout ar maout en afer-se, Naig. Nemet..."

"Nemet?"

"Nann, n'hellan ket kinnig se dit!"

"Grit, memestra."

"Nemet e c'houlennfez digant ar grouadurez dieubiñ da dad, setu an diotach a soñjen ennañ."

Ne oa ket ar re all evit degemer kinnig ar c'helenner. Diouzhtu e huchjont holl a vouez uhel, tres ar strafuilh warne.

"Penaos, Aotrou kelenner, prest oc'h da lakaat ur verc'h yaouank en arvar?! Disoñjet ho peus: darbet eo bet din koll daou eus ma zud gant an euzhvil-se ha n'ouzer ket pegoulz e vo pare ar major Jones?!" a enebias ar c'horonal. "Evelkent!"

"Ha n'eo ket bet spontet ar plac'h yaouank-mañ gant ar weladenn dremenet, marteze?" a gendalc'has O'Brian, "Gant ar vezh!"

"Dousig dezhi, tudoù!" eme C'heiger. "N'am eus ket ankounac'haet ar pezh zo c'hoarvezet gant daou ezell eus Eurosterenn, anat deoc'h, met an egoriad n'en deus diskouezet tamm taerder ebet abaoe an darvoud war al loar."

"Trawalc'h din-me, Aotrou kelenner. Re zañjerus eo." a respontas rener ar porzh-egor.

Ar c'helenner a chome sioul daoust d'ar gorventenn a oa kouezhet warnañ d'ar mare. Gant ur mousc'hoarzh e selle ouzh paotred Eurosterenn, ha setu ma lavaras gant e zaoulagad lirzhin un dra hag a souezhas an holl mik.

"N'eo ket hennezh an hini dañjerusañ amañ."

"Ne..., ne gomprenan ket ar pezh a lârit, Aotrou." eme ar c'horonal Guareschi.

Deuet e oa brav an taol gant Geiger, hag e kendalc'has, en ur luchañ war-zu e genlabourer:

"Naig ha Kelvin, ha bet ho peus ar santimant e oa droug ha dañjerus an egoriad? N'am eus ket bet. Spontet oc'h bet gant un dra nevez evidoc'h, met goude-se? En arvar e oac'h?"

Ha n'eo ket memes aon en deus paket anezhañ war al loar?"

Ar plac'h hag ar skoazeller a rankas anzav n'o doa ket santet na taerder nag arvar en o eskemm gant ar grouadurez.

Ur pennadig c'hoazh hag ec'h asantas an holl ne oa ket marteze an egoriad ul loen ferv anezhañ. Ha Naig a lavaras e oa a-du da vont e log ar grouadurez, ganti ar spi da saveteiñ he zad.

"Mat," a huanadas Guareschi, "greomp evel-se. Bremaik, da... un eur hanter, da lâroust eo trizek eur hanter, e rafomp an taol-esa. Poent eo din kimiadiñ bremañ, kefridioù all zo warnon, kenavo."

Geiger a reas ur serr-lagad da Naig. Levenez a bare war dremm ar skiantour kozh.

*Ha bremañ? Petra vo graet da c'hortoz?*

## Navvet pennad

Eno he deus an Dimezell Jones an dro-gaer da weladenniñ un darnig eus ar porzh-egor ha da adkavout tud ha n'int ket dianav dezhi.

Kemeret e voe an dijuniñ er sal vihan en em gavent enni gant Naig hag an daou skiantour. Brav oa dezhe ober un ehan er mod-se, rak goull bras e oa stomog ar veajourien, hini Bernez a dra sur. O-unan e oant, rak O'Brian oa aet da vouetañ ar major kousket ha da soursial ouzh e re glañv.

"Goude merenn e laktomp dit elektrodennigoù evit muchañ obererezhioù da empenn pa vi el log, Naig." a lavaras Geiger en ur gemer e bevare podad yod avaloù. "Bez' e vo Salomon ganit, hag O'Brien ha me er pezh all, en tu all d'ar voger. Mat eo dit?"

"Ya, Aotrou kelenner."

"Arabate eo dit reiñ Aotrou kelenner din, ne ran ket gant Dimezell Jones diouzhit. Jens eo ma anv bihan."

"Yaens?"

"Ya, Jens."

Darbet e voe d'an aotrou Kelvin tourlonkañ. E dasad kafe a strinkas war e fas gant ar souezh. Bez' e c'helle ar plac'hig vihanse ober gant e anv bihan d'ar c'helenner pa raent-int gant o anvioù familh nemetken goude daou vloavezh a genlabour! En em dorchañ a reas hep bezañ gwelet gant ar re all, n'eo ket gwir e oa jealous outi memestra, o nann avat!

D'ar poent-mañ ec'h erruas Raissa Legrand er sal-vihan. Kaset e oa bet gant ar c'horonal Guareschi evit soursial ouzh Naig er beurevezh, rak echu oa he labour evit ar mare. Laouen bras e voe ar plac'h da vont da weladenniñ ar porzh-egor ganti.

"Araok e kasan ac'hanout d'az kabinenn, Naig, rak dilhad all a rankez gwiskañ evit chom hep bezañ merzet gant an dud all, goût a rez. Dav vo dit ivez chignoniñ da vlev, evel-se vez graet amañ gant ar re a fell dezhe mirout hir o blev."

Ar gabinenn ne oa ket pell ha ne gejjont gant den ebet war o hent. Bihan ha naet e oa, gant div gouchenn. Sac'h Naig a oa bet kaset di ha lakaet war ur gouchenn. Ur c'horn er gambr a servije d'en em walc'hiñ, gant ur ministrinker zoken, koachet er voger. Hiziv-an-deiz ne oa ket ur gudenn ken adkavout dour propr e bourzh Eurosterenn.

"Setu," eme ar bilotez, "bremañ e vefe graet ur stajourez diouzhit, bras ha gwisket evel m'out."

*Pebezh istor! Naig Jones, ar spierez kalonek war hent he flanedenn: saveteiñ an hollved rak an distruj diwezhañ. Ma vije bet lâret din un deiz e vijen bet o vevañ troioù-kaer ken sebezus... O, Mamm, Tad, keuz am eus deoc'h. Na pell emaoch diouzhin!*

"Naig? Mont mat a rez?" a c'houlennas ar vaouez.

"Ya, o soñjal em zud e oan." eme ar grennardez.

"Kalon dit. Pep tra a dremeno mat, kred ac'hanon." a eilgerias Raissa Legrand ha fichañ

chignon ar plac'h yaouank araok disklêrian gant fent:

"Sonn, eil klas Jones, d'am heul! Un', daou, un', daou..."

Ha Naig a grogas he gwelladenn. Ar bilotez a ziskouezas dezhi an egorlistri bihan hag an dachenn eoriañ evit ar Bulzunoù bras. Al lec'h-se a oa ur bladenn ront ha bras-meurbet ne droe ket ordin gant memes tizh eget peurrest ar porzh-egor evit permetiñ d'ar fuzeennoù da zouarañ - ket ! da eoriañ - gant o eorioù magnetek. Rak ret oa d'ar porzh-egor treiñ trodro dezhañ e-unan a-benn krouiñ un nerzh-dedennañ heñvel ouzh hini an Douar. Ur sapre labour da ijinañ, un araokadenn evit an egoraerien!

Eno e kavjont Mike e-kichen an Durzhunell. Hemañ a zegemeras anezhe gant plijadur. Bez' e oa o kempenn an egorlestrig evit ur veaj a rafe a-benn peder eurvezh bennak betek Ingolstadt e bro Alamagn. Hag Alan? Penaos e oa e jeu bremañ? Met ne voe ket kendalc'het gant ar gaoz: Raissa a reas sin da Vike paouez, tud all a oa er c'harrdi-egor.

"Emichañs e vin distro pa returniñ d'ar gêr, plac'hig." eme paotr ar c'heflusker. "Chañs vat dit!" Ha hemañ ha lavarout c'hoazh kement-mañ en ur grapat en Delfin X 300: "Neuz un egoraerez leun a skiant-prenet a zo ganit, feiz!"

Amzer o doa ar plac'hed da bourmen etre renkadoù ar plant el liorzhoù-egor savet eus al leur betek ar solier. Frondoù liesseurt a c'hweshjont, frouezh ha legumaj dreist-holl, met un nebeut bleunioù a oa ivez.

"Al lec'h nemetañ war Eurosterenn eo ma 'n em santer evel war an Douar. N'eo ket bras, met ur bern plant zo dija da zielfenniñ." eme ar bilotez. "Dispar, neketa?"

"Hag ez eo..." a respontas ar plac'h yaouank, damserret he daoulagad.

Eñvorenn eus he bugaleaj a zeuas dezhi: un abadenn-gampiñ war ar maez gant he zud.

## Dekvet pennad

Bez' he deus Naig darempredoù nevez gant tager he zad ha hemañ ha kinnig un dra iskiz d'hon harozez.

Goude merenn en em strollas ar skiantourien ha Naig er sal-vihan nepell ouzh al log. Bez' e oa deuet ar c'horonal Guareschi da lavarout dezhe e oa pres warnañ gant an afer gevrinus a bege ouzh Eurosterenn: isofisiel ne ouie den c'hoazh perak e oa bet beajoù ken niverus etre ar porzh-egor ha Gwipavas, met ar sekred ne oa ket chomet dalc'het mat penn-da-benn. Frioù-furch ar mediaoù ha re ar servijoù kuzh estren a glaske bremañ gouzout hiroc'h.

"Evit klozañ, tudoù," eme ar c'horonal, e javedoù stardet, "roet zo bet din daou zevezh gant ar BIKE, Burev Ispisial Kuzul an Egor araok diskuliañ hor c'havadenn da Unvaniezh ar Broadoù Unanet."

"Laeret vo deomp an egoriad ganti ha lakaet anezhañ etre daouarn an Amerikaned!" a estlammas Salomon Kelvin. "Daou zevezh! Ken nebeut a amzer evit gallout tennañ ar muiañ posupl dioutañ... Digroc'henet bev a vo gante!"

"Peoc'h, Kelvin! Tud a-skiant eveldomp int."

"Met, Aotrou kelenner, bez' ho peus aze gwellañ benveg ho studioù dazont ha hemañ war-nes diflipat..."

Kelenner Jens Geiger a luchas d'e skoazeller en un doare hag a sinifie tevel. Ar strafuilh a oa bras er sal-vihan, ha koulskoude ne lavare den ger ebet.

"Aotrounez, ha Dimezell," eme ar c'helenner kozh, e dal roufennet muioc'h evit biskoazh, "d'al labour, ha diouzhtu!"

Hag an holl ha mont er-maez ar sal davet al log hag ar pezh neshañ.

Ar mezeg-meur a gerzhas d'o c'herc'hat raktal ma welas anezhe. Tres ar souezh a oa warnañ.

"Buan, buan! Deuit! An egoriad... O paouez reiñ boued dezhañ emañ ha ne ra nemet

lârout Naig, Naig Jones dizehan! Klasket en deus ivez pakañ ma brec'h, met deut on a-benn d'en em dennañ justik eus e grabanoù. Krial a ra hag e ra! Ur spont..."

A-benn ma tigoras Naig dor al log, Salomon war he lerc'h, e tavas huchoù skrill an egoriad. Stlabezet en doa e voued war al leur hag en klask tremen dre barennoù ar gael a zispartie ar pezh. Gant e zaoulagad du-pod e sellas an egoriad outi, sioulaet.

"An elektrodennigoù, ankouaet hon eus an elektrodigoù, Naig." eme ar skoazeller, nec'het bras.

"Gwazh a se."

"Ec'h an da glask anezhe, chom a-sav ha gortoz.", a lavaras ar skiantour ha reiñ da gompren d'ar gward dirak an nor diwall pep tra pishoc'h eget boaz.

Dizaon e taolas Naig he fouez war al leur, hep tec'hout he selloù diouzh re ar grouadurez. Honnezh a reas evelti.

"Salud dit." eme ar plac'h yaouank ha saludiñ gant un dorn.

"Lu-tih ?"

"Ya, salud dit. Naig eo ma anv. Ha te? Piv out?"

*Perak ne glevan ket e vennozhioù?*

"Na-ik! Djo-neuz! Ludit!"

Salomon Kelvin ne zistroe ket. Chomet e oa bamet er sal neshañ, o sellout dre ar prenestr edo, evel ar re all. Ne oa trouz ebet, nemet marteze anal ar gward a gleve Naig en tu all da doull an nor.

*"Salud dit, Naig. Laouen on ouzh da welout." E! Em fenn emañ adarre! "Ya, laouen on." Piv out? "Ngekshtok vez graet ac'hanon gant ma re. Jones all a zo amañ?" Jones? Ha, ya, Salomon, ha Jens.*

Ar grennardez a gomzas neuze, evel evit reiñ nerzh d'he goulenn:

"Petra 'teus graet d'am zad? Perak 'teus laeret e spered dezhañ?"

"Zad? Spret? Na-ik"

*"N'am eus graet netra a-eneb d'az tad, Naig, nemet eskemm gantañ, met ampechet omp bet. Ar yenien, ar goullou, an egor, o spontus eo oa! Naig, skuizh on bremañ ha diaes eo din... Touch ac'hanon, touch ma fav ha... Naig! Gra pezh a lâr! Hast 'ta mar plij!" Tadig! Te an hini eo? "Ya, ma merc'h, me... Ngekshtok on, touch... Da dad, ezhomm 'm eus eus da dad. Ezhomm 'm eus... Naig, deus d'am..."*

Hag an egoriad ha kouezhañ war al leur, badaouet.

Dont a reas Kelvin hag O'Brian tre ha sikour ar plac'h da sevel war he divhar. Gwan en em sante-hi.

"Ma zad," emezi, "Fellout a ra da...Ngegek-a- stok?... Ya, d'an egoriad bezañ gant ma zad."

### Unnekvat pennad

Lec'h ma tihun ar major Jones ha ma c'hoarvez un dra zic'hortoz gantañ hag e verc'h.

Deuet e oa Naig e-barzh en-dro ha ne sante ket ken ar skuizhder paket ganti e-pad an diviz dreistordinal he doa bet gant an egoriad. Mont ha dont a rae er sal he moger dreuswel, lastrus e kave an elektrodennigoù lakaet war he fenn gant an aotrouez Kelvin hag O'Brian.

"Mat eo an disoc'hoù," a gemennas Salomon Kelvin, en ur lenn an dielfennadurioù a zirolle dirazañ war an urzhiataer, "skannet hon eus da empenn ha n'eus kudenn ebet ganit, nemet..."

"Nemet?" a c'houlennas Naig.

"Nemet?" a c'houlennas ar c'helenner Geiger.

"Digredus! Sellit, Aotrou, sellit!"

Tostaat a reas Jens Geiger ha lenn e-unan an disoc'hoù hep diskouez bezañ souezhet ebet.

"Ya, Kelvin, ha neuze?"

"Amañ, sifroù ar feur-mañ. Ur fazi eo, ya, ur fazi eo, ret eo adober an test. Sur a-walc'h zo bet un elektrodennig o risklañ ha..."

"Ket, Kelvin. N'hon defe ket an dielfennadurioù all ma vankfe un elektrodennig, goût a rit mat."

An daou skiantour a zalc'he bremañ o selloù ouzh ar plac'h yaouank a anavezent, mut e choment. Ar c'helenner a doc'has araok komz, met Naig eo a gomzas an hini gentañ.

"Graet ho peus din test Bach-Sullivan ur wech c'hoazh ha kresket ma notenn, n'eo ket? Eo. C'hwi a gav deoc'h eo... Nge... Ngekshtok kiriek d'ar c'hemm? Mall zo warnañ adwelet ma zad."

"Serten!" eme Geiger laouen. "Ha ha! Pebezh kammed vras! An N'eo-ket-stok-se a zo bravañ devezh ma buhez, Kelvin!"

"Ya, aotrou kelenner," emezañ, "met perak ganti hepken? Santet hon eus an diviz empennek o deus bet, ni ivez?"

"He zad, ma skoazeller yaouank, gantañ emañ an diskoulm. N'eus ket da dortañ pelloc'h: degasomp ar major Jones el log ha gortozomp ma tihuno N'eo-ket-stog buan." a ginnigas paotr e zaoulagad lirzhin.

O'Brian a stankas toull an nor gant e gorf ha lavarout:

"N'on ket a-du, Geiger. Ne vo ket kaset ma c'hlañvour dirak ar grouadurez."

"Ac'hanta, a gav deoc'h?" a eilgerias ar c'helenner en ur c'hwezañ e jave ha lakaat dousig pezhioù daouarn war divskoaz ar paour kaezh mezeg. "Ma n'oc'h ket prest da sikour ac'hanomp, da saveteiñ hag ar major hag al loen ferv ho peus toullbac'het," emezañ luehek, "e c'houlennin digant ar sorzerezig-mañ lakaat ac'hanoc'h dindan kazel-ge. N'eo ket gwir, Naig?"



"Eo, kelen... hem, Jens!" a respontas ar plac'h, c'hoant bras c'hoarzhin ganti. "Met hastomp buan, bremañ, mar plij, d'ev eo Ngekshtok da vervel, me gred."

*"Sorserezig" Komz a ra evel Fulup.*

"Geiger, n'emaoc'h ket ganti ken." eme rener an ospital. "Gervel a ran ar c'horonal, hervez ar reoliadur."

"Ket. Kemer a ran ar penn, pezh a sell ouzh an traoù amañ." a enebias ar gorilh en ur vountañ O'Brian en trepas war-bouez e gof tev.

"Ma... Mar karit." a chuchuas ar mezeg-meur, lakaet diaes.

"Infirmier! Ur gwele-red evit ar gambr 14!"

Araok pell en em gavas tad Naig el log, e wele-red stok ouzh ar gael, kousket bepred. Kaset e voe kuit O'Brian da gerc'hat alc'hwez ar gael ne oa ket gantañ hag an dud ha gortoz dihun an egoriad. Ar pezh a reas dizale.

Diaezamant en doe d'en em lakaat en e sav, gant harp ar gael, estonet gant niver ar re a selle outañ didrouz.

"Na-ik." eme ar grouadurez, an hik ganti ha kouezhañ en he foull.

"Nann!" a grias ar verc'h.

Redek a reas betek ar gael ha lezel ur vrec'h da dremen etre div varrenn da harpañ an egoriad reuzeudig. Klasket en doa skoazeller ar c'helenner mont war he lerc'h evit herzel anezhi, met a-boan ma reas ul lamm war-raok, e kilas hep gouzout diouzhtu nag ar perak, nag ar penaos: Geiger en doa tapet krog e chupenn an den yaouank.

"Peoc'h! Kit da welout kentoc'h pelec'h emañ O'Brian, dale zo gantañ." emezañ d'e skoazeller.

Lakaet he doa Naig he vrec'h dindan hini Ngekshtok ha sikouret anezhañ da vont en e sav. He dorn a douche kroc'hen blevek razh an egoriad, glas ha dous. Merzout a reas ar verc'h pront ar pezh a hañvale bezañ kalon an

estrañjour o stokañ gwan ha disingal, e zaoulagad a heulie e dorn kren-digren.

*"Naig! Da dorn war tal da dad, evel don. Ne vimp ket re hon zri... Ya, brav. Laosk da spered dieub din, gra, ma merc'h... C'hoazh, ya, dis... par, mignoned, kenavo..."*

Sachet e voe korf Naig gant pouez dinerzh Ngekshtok ha pokañ taer ar gael, ken ma kollas he anaouedegezh.

D'ar mare-se e tistroas skoazeller ar c'helenner el log, tres faezh warnañ. O'Brian a zeuas tre war e lerc'h ha gwelout a raed e zent gant ar pezh mell mousc'hoarz a rae: deuet e oa ar c'horonal gantañ. Hemañ a antreas ivez, ur gward a-drekañ.

"Aotrou kelenner, echu ar blijadur!" a roas Guareschi da c'houzout. "Paouezit diouzhtu gant ho troioù-kamm. N'oc'h ket ar mestr amañ, me lâr deoc'h, ha... ? O'Brian! Sellit ! Santez Anna ar Stered!"

Edo ar major Jones o sevel eus ar gwele-red.

*"Ma merc'h karet... Naig kalonek, dihun 'ta! Arabat eo din koll ac'hanout bremañ. Divadaou, ale!"*

Hag ar plac'h yaouank a zigoras ul lagad ha gwellout he zad a vousec'hoarzhe outi. Santout a rae penaos e touge anezhi e en zivrec'h, dianken ha laouen bremañ.

"Tad? Na dinec'h on ganit aze, deut out en-dro." emezi.

"Ya, distro on, goude un hir a veaj." a respontas Alan Jones ha chom mut goude, e spered troet war an devezhioù dreistordinal en doa tremenet er-maez e gorf.

Naig a lakaas he fenn war bruched he zad, ha serriñ he daoulagad adarre, disoursi ha skuizh bras war ar memes tro. Bizied ar major a flouras he blev ur wezh pe ziv hag hi gourvezet war ar gwele-red justik goude.

"Ha Ngekshtok?" a c'houlennas-hi hep gallout azezañ, ken gwan ma oa he divesker.

"Re bell eo bet hep kaout an dro-gaer da zilezel e youl diwar ma hini, siwazh. Aet eo kuit da viken, met araok en deus profet deomp ur varregezh ha n'omp ket mestr warni."

Ar gaozig etreze o daou a voe troc'het gant komzoù bamet ar re all er sal.

"Biskoazh kemend-all!"

"Major!"

"Ur burzhud, Aotrounez, ur burzhud eo!"

"Na piv en dije kredet?!"

Hag an holl da vont davet tad ha merc'h ha stardañ dorn an eil hag eben, hag ober gourc'hemennoù, c'hoarzhin ha sevel o divrec'h d'an nec'h.

Buan e voe ar c'helenner e spered gant un dra all ha goulenn alc'hwez ar gael digant ar mezeg-meur. Ur frapadig c'hoazh hag e stouas Geiger dirak korf an egoriad ha selaouennañ anezhañ. Divuhez, ya, soupl an izili c'hoazh evel-just, met en ur sellout pizh ouzh ar c'hroc'hen dindan ar blev glas e weler dija pikoù ruz lec'h ma oa bet ar c'horf o touch al leur. Ar skiantour kozh a laoskas un huanadenn, gant palm e zorn e serras goustadik daoulagad dilufr Ngekshtok ha kemenn d'ar re all:

"Burev Ispisial Kuzul an Egor a c'hell dont, bremañ, echu eo hor c'hefridi gant ar paour kaezh-mañ, d'am meno." emezañ, gant e vouezh o krenañ.

Ar c'horonal Guareschi a anzavas e oa ur c'holl bras hag a oa c'hoarvezet aze evit ar skiant araok reiñ urzhioù, ar pezh a ouie ober mat-tre.

"Kabiten O'Brian, grit tro-dro d'ar c'horf gant evezh, ha prontamant, mont a ran en darempred gant ar BIKE a-benn-kaer. Kelenner Geiger, deoc'h-c'hwi ivez ha d'ho skoazeller da amprouiñ asamblez gant ar c'habiten m'eo yac'h ar major hag e verc'h, korf ha spered. Dalc'het e vo ar rentañ-kont em burev da bemp eur noz. Ha c'hwi, Major, kavit buan ur gwiskamant a-feson: ur bugel zo amañ!"

## Daouzekvet pennad

Er pennad diwezhañ-mañ e vez displeget traoù zo, kuzhet re all ha lakaet un termen d'an istor gant ur veaj all.

Pa grogas an emgav e burev ar c'horonal, un eurvezh bennak goude degouezhadennoù poanius an endervezh, e stumme an holl dud azezet un hantergelc'h dirak rener Eurosterenn. En tu all d'e gador e weled banniel Europa gant e ziv sterenn ha tregont a rae un droellenn velen war un oabl glas. Bez' e oa eno ar re Jones, tad ha merc'h, ar mezeg-meur O'Brian hag ar skiantourien Kelvin ha Geiger.

Peadra da zebriñ hag evajoù tomm a oa bet degaset, rak erru oa pred an te hag an holl laouen dirak ar boued. Naon o doa goude an darvoudoù o doa bevet hiziv, anat deoc'h, ha daou zen o doa kroget e-barzh hep gortoz pelloc'h aotre Guareschi: ar c'helenner Geiger hag ar major Jones.

Echu e damm gwastell gantañ en ul lonk e lavaras Alan da O'Brian:

"N'ouzon pet petra ho peus ensilet din d'am boueta e-pad ma c'homa, Kabiten, met gwelloc'h eo ar pred-mañ, me lâar deoc'h!"

O'Brian a reas van n'en doa ket klevet, ha kuzhañ e fri en e dasad kafe. Ar c'horonal Guareschi a zeus war sikour.

"Major Jones," emezañ, "...opala, chomit war ho pouez, ofiser, n'oc'h ket pare da vat c'hoazh. Diskuizhit neuze ha laouen e vin pa adwelin ac'hanoc'h ouzh ar stern.."

"Ya, Sir."

"Mat. Ha neuze, Aotrounez," e c'houlennas ar penn-bras, "selaouennet ho peus ar major hag an dimezell Jones, penn-kil-hatroad. Roit deomp ho ali."

"Ya, Sir." eme O'Brian ha mont a-sav. "Mont a ra mat pep tra gant ar major Jones hag e verc'h, nemet ur bloñs pe daou. Adkavet en deus ar major implij e zivrec'h bet gloazet e-pad an emgann war al loar."

"Ne oa ket un emgann!" a estlmmas Geiger.

"Hervez rentañ-kont ar serjant Monod e oa unan." a respontas ar mezeg. Saludiñ ha reas hag azezañ.

"Trugarez deoc'h, Kabiten." eme ar c'horonal ha kenderc'hel gant ar gaoz. "Aotrou kelenner?"

"Aotrounez," emezañ hag echuiñ e wispidenn buan ha buan, "adgraet hon eus dielfennadurioù a bep seurt hag e c'hellomp kemenn n'o deus na Naig nag Alan gouzañvet netra fall a-fed ar bred. Traoù all hon dije da lârou, met n'ouzon ket hag-eñ eo sur al lec'h-mañ evit diskuilhañ seurt traoù, Guareschi."

"Kudenn ebet. Lârit ar pezh ho peus c'hoant hag e welin ma vo kelaouennet pelloc'h ho kerioù pe get."

"Trugarez deoc'h. Setu: Neg... Nget... an egoriad en deus kemmet un dra e speredoù Naig hag Alan, ha deut int da vezañ pellsanterien."

"Pellsanterien, emezit-hu? Emaoc'h o lârou deomp int gouest da lenn mennozhioù ar re all, penaos din-me, emaint o lenn hor mennozhioù?!" a estlmmas rener ar porzh-egor ha sellout ouzh an daou zen dreistordinal azezet nepell dioutañ.

"Evit gwir," a gendalc'has Kelvin, "n'hellont lenn en hor speredoù nemet stok ouzhomp, ha diaes eo dezhe. Met kalz aesoc'h eo etreze. Deut int a-benn da vezañ e darempred dre bellsantout hep chom stok-ouzh-stok e pad daou-ugent eilenn. Bez' e oa ar c'helenner Geiger e soñj diskuilhañ pep tra d'ar skiantourien er bed a-bezh, met displeget 'm eus dezhañ e oa gwelloc'h chom mut ha mirout seurt keleier evidomp-ni en Europa evit c'hoazh."

"Mat ho peus graet, Aotrou Kelvin. Ar Burev Ispisial en do ar c'heloù evel-just, ha graet e vo pep tra ma chomo etrezomp ar sekred-se c'hoazh. Pezh a sell ho studiadennoù, bezit sur e c'hellit kenderc'hel ho kenlabour ganeomp hag ar major hag an dimezell Jones."

"Petra?" a c'houlennas Naig, he genoù digor bras hag ruz he divjod "N'omp ket moc'h Indez! Mamm a c'hortoz ac'hanomp ha n'he deus bet keloù ebet c'hoazh!"

"Sioul! Dimezell Jones," eme ar c'horonal, ha krizañ e fri, "goude an tolp-mañ e c'hellit pellgomz d'ho mamm, ho tad ivez." Ha gant ur mousc'hoarzhig e kendalc'has evel-henn: "N'eo ket kroget ho vakañsoù ganeoc'h, met warc'hoazh e retornfet d'ar gêr: n'ho po ket kollet kalz amzer 'vat."

Goude-se e komzas tad Naig eus an darvoudoù war al loar. Penaos en doa klasket Ngekshtok kaout oksigen p'en doa ar serjant Monod digoret e sac'h-saveteiñ lec'h ma kouske morzet, penaos evit en em zifenn ouzh ar major e oa bet ret dezhañ dont da vezañ mestr war spered ar merdeour. Nemet e oa bet ur gudenn: gant an endro zigevannezus e kouezhas an egoriad en e vorzhidigezh adarre, kousket-mik.

"Pa lâren tuchantik ne oa ket un emgann." a roas ar skiantour luchek da gompren d'e amezeg.

Pa c'hellas Ngekshtok dihuniñ, en em gave en ul lec'h dianav, gant krouadurezed iskiz oc'h evezhiañ anezhañ, disfiziuz-kenañ. Ne oa hini ebet en o zouez a bellsante eveltañ, ha seul vuic'h e klaske mont a-stok gante evit bezañ intentet dre nerzh e spered, seul rouesoc'h e tostaent dioutañ.

Er penn-kentañ toud, p'en doa merzet e oa spered ar major paket en e empenn, e oant bet e darempred, met skuizhus-tre e oa, peogwir e ranke implij an darn vrasañ eus e nerzh-youl da ren a-bell korf diempennet ar major. Hag e gousk ne lakae ket anezhañ da ziskuizhañ tamm ebet, e gorf hag hini ar major da chom bev, ne lavaran ket.

*Roet en deus e vuhez evidout, Tad! "Ya."*

"Ya, Aotrounez," eme Alan Jones d'an holl vodet er burev, "en em ziviet en deus betek re ma vevfen c'hoazh."

"Pebezh sakrifis!" a anzavas O'Brian. "Pa raen-me loen outañ..."

"Dic'hoanaget ha skuizh-divi e c'hortoze ar marv en e doull-bac'h, ha me kollet ma c'horf hag ar spi ganin a rae eveltañ ivez, pa erruas ma merc'h a-daol-trumm, evel dre vurzud." a zisplegas c'hoazh ar major hag ober un ehan

araok echuiñ. "Ar pezh a zo c'hoarvezet war-lerc'h a anavezit dija."

Ar c'horonal hag ar skiantourien a c'houlennatas ar major Alan Jones diwar-benn buhez an egoriad, eus pelec'h e teue hag all. Met n' en doa ket bet Ngekshtok nag an amzer nag ar youl da gelaouiñ anezhañ war an traoù-se muioc'h eget pep pennañ e istor dezhañ.

Dont a rae Ngekshtok eus ur blanedenn lec'hiet tost da Alpha an Den-Marc'h, ur bed-dour dre vras. Eno e oa ur sevenadur araokaet renet gant tud eveltañ, an Ngeko - da lavarout eo: ar Pennoù - e lein ar skeul. Bez' e oa an darn vrasañ eus ar boblañs gouest d'ober gant ar pellsantout a-stok (da nebeutañ), hag ar re n'hellent ket a veze graet Kengo anezhe: an Dornioù.

Kaset o doa un egorlestr davet koskoriad an Heol, met c'hwitet an taol gante ha n'eo ket an Douar o doa tizhet, met Europa, loarenn Yaou, ul lec'h yen ha divuhez, daoust d'ar skorn ha neuze d'an dour warni. Torret ma oa keflusker o egorlestr, o doa strivet evit gallout sevel ur porzh-egor ha bevañ er savadur war Europa an hini wenn.

Met tri Ngek, Ngekshtok en o zouez, o doa kendalc'het ar veaj gant ur seurt egorvulzun betek ur gwallzarvoud spontus gant un asteroidenn. Ne chome ket kalz ken eus an egorvulzun pa beñseas war al loar, ur sizhunvezh zo, prestik araok bezañ spurmantet gant skipailhad ar major Jones.

\*

\* \*

Naig a vriatas he zad ur wezh c'hoazh araok mont d'an nor-aer a gase betek ar Vulzun.

"Ale, merc'hig, poent eo deomp kimiadiñ bremañ, a-hend-all e loc'ho ar Valum hepdout hag e ranki gortoz daou zvezh muioc'h araok kuitaat Eurosterenn. Ha n'eo ket da Vrussel e vefez kaset evel hiziv, met da Braha!" emezañ. "Bouch da Vamm evidomp, pa vi distro."

*"Kenavo. Na fier on ganit! Soñj a rin ennout e-pad da veaj gant ar c'hirri-nij betek Gwipavas."*

"Kenavo, Tad." a respontas Naig, pres warni gellout lemel he chignon hag he gwisk

stajourez kerkent ha degouezhet war an douar-patez. "N'ankoua ket saludiñ Raissa, Mike ha Jord eus ma ferzh!"

Geiger ha Kelvin a c'hortoze anezhi e-tal an nor-aer. Bez' e oa ur sac'had hir stag ouzh ur gwele-rod da gas d'ar BIKE e Brussel ivez.

Tostaat a reas ar plac'h yaouank oute ha chom a-sav dirak ar sac'h. Den ne selle... Sachañ a reas war ar serr-prim goustadig ha gant c'hwekter e roas ur pok war tal an egoriad.